

KANTIK

da

ITRON VARIA AN NIVER

TOLIT EVEZ MAD. — Daou bardon a vez bep bloaz en Niver : ar pardon braz da c'houel ar Pantekost ; ar pardon bihan da c'houel Maria Anter-Eost.

—•—
Diskan.

Itron Varia an Niver,
Hor zikourit e peb amzer :
Skuillit grassou eb niveri
Var gement a deu d'ho pedi !

1. A rum da rum hon tadou koz
Zo deut da c'houlen ho pennoz ;
Evel dho ni gar dont ive
Da glask ama sikour an ee.
2. Gant karantez ho saludomp :
Evel al loar koant ho kavomp ;
Bleun al lili hag ar rozen
A zo disliv en ho kichen.
3. Ma ro douaren an Niver
Id ha foën dru d'al labourer,
En ho chapel, mam benniget,
Founnussoc'h east vez destumet.
4. 'Vit peb klenved ha peb glac'har
C'hui rô remed d'an nep ho kar ;
Ha den né guita ho pardon
Na ve ar joa en he galon.

5. Ar martolod, pa foll ar mor
A red d'ar porz da glask goudor :
Pa gouez anken, trubuill varnomp,
Gant hast d'ho kaout e tiredomp.
6. Hirio an deiz e rer brezel
Da Zoue, d'he Iliz Santel ;
Gant ho sikour, ni Bretonet,
A zalc'ho stard d'hor feiz karet.
7. Daou dra zo a garimp bepret :
Doue hag he vam benniget ;
'Vel hon tud koz ni lavaro :
« Kent eget chench ni 'a varvo ! »
8. Brema, Gwerc'hez, 'bars kimmiada,
Savit ho torn d'hor benniga.
Ho pennos d'ar belerinet
Ha d'ho c'herent er gear chomet !
9. Var bleg ho prec'h ni vel Jezuz
O vouse'hoarzin karantezuz ;
D'ho pizach e sav he zornik
Evit ober d'he vam lazik.
10. Larit dezhan, mam dous ha mad,
Distrei ouzomp he zaoulagad,
Hag astenn he zaouarnigou
Da skuill varnomp puill he c'harrassou.
11. Pa vezimp var hon tremenvan
En hor c'hichen bezit ganthan ;
Ha grit digeri dor an ee
Deomp he vreudeur, ho pugale.

Imprimatur :

Quimper, le 26 Juillet 1906.

F. CORRIGOU, vic. gén.